

64

SKRIVAGNER HA MUNTREUR

Eur skrivagner gweziek war blun he wele moue
Oe didruez d'he heur fal'het gant an Ankou.
Eul laer, d'ar mare ze, oc'h ija euz ar groug
A bae die he dorjeou.

Setu va daou habar dirag ar gador-varn ;
Setu ho daou kavet gwali zaotret ho daouarn.
Er bed man, piou n'er goar, er barnedigeziou
Ribler a c'hell kuzat, ha barnet fazia,
'Met barnet ar bed all, hennet a wei peb tra,
Hag a zo kompez he boueziou.

Dindan diou bez kaoter 'zo c'hoazet daou dantez :
Unan 'zo ken bihan ma'n deuz a veac'h buez ;
Ao eil a zo ken braz ma frailh ar mogeriou
Tro-war-dro e palez tevat an diaoulou.

Heman 'zo great 'vit ar muntreur,
Egite 'vit ar skrivagner ;
Ma c'hoarze goab paotr al leorion,
Epad n'en devoa **hen nemet** eus neubeut glaou,
O klevet al laer paour o iudal,
O selaou he eskern o strakal.

Siouaz !
Abarz nemeur e rouz pen d'ar vaz :
Tantez braz ar muntreur a zigreske bepred ;
Setu hen bihanik, setu hen peurzevet ;
Tantezik hen doktor, deat eur gwie dan ifern
A ra breman hervi betek mel he eskern.
Hag heman d'en em glem. Ia, d'ezhan ken braz doan,
Pa ne oa mul dindan ar muntreur fulen dan !

E gwicionez,
Ha kement-se d'an holl da welet a oa ez,
Ar varn oa disteal.
Penaoz, hen den brudet, hen skrivagner dispar,
Kemeret 'vit eun Doue p'elo war an douar,
Laketao hirio kevatal

Ha zoken kabluoc'h eget ar boued ar groug
A zo kouezet kraban al lezen war he choug !
Epad ma komze evelse
An diaoul kam er selaoue,
« Petra, 'mezhan, loen divalo !
» Ar c'hoari nevez a zo brao !

- « Te zont beza dibec'h e skoaz eul laer hent braz ?
- « Ne c'houlfen ket e pe c'hoariet gant pen-haz,
- « E pe renket morse chacha prim da vragou
- « Araog an archerien harb ouz saol da voutou,
- « 'Met da leorion bemdez e kant leac'h 'zo lennet
- « Hag ho c'hontam livet en em zil er spered ;
- « En-ho kement 'zo fall a gemer drem ar mad,
- « Ar pijadurioù-touz e rez outho kalz stad ;
- « Evit trouc'ha berroc'h, pen-da-ben da skridou
- « A zo leun a skouer-fall hag a foitent ziou,
- « O nan, ne ket d'ar c'horf e roo it ar maro ;
- « Gwasa 'zo, an ene a vez tizet gantho,
- « Ha c'hoaz ! ne ket d'ar c'horf ? Ha ne lavarez ket
- « Eo mad en em lac'ha pa vezer skuiz ec bed ?
- « Pa ie war an dachen daou zen dirak testou
- « Da c'hoari gant kleze pe gant pistolennou,
- « El leac'h ioual d'an holl e reat eur c'hoari fall,
- « Bepred en da skridou e vezent didamall.

« Muntreur ar c'horf hag an ene,
« Piou 'zo duoc'h eget oud-te ?
Hag an diaoul a reaz d'ezhan gwelet
Kement ene a oa dreizhan daonet,
Ha kement den a oa c'hoaz e buez
Euz he len d'an ifern a ziruihje bemdez
Kerkent, gant trouz kurun, euz daoulagad Satan,
Diou luc'heden a struk evit kreski an an.
Ar skrivagner a laok eur iouaden euzuz ;
Paol Gornek a dec'h pell en eur c'hoarzin skrivaz.

(Le Bannier du Finistère 24 Juin 98. Gwennael)

Handwritten notes and signatures:
M. G. G. G.
Coranet
G. G. G. G.
G. G. G. G.

Clp
A) EP
—)

et
le
ce
ant
Se
e - 11